

KANAOUENN


Patronaj pötred Poullan

I

Marteze, tadou ha mamou,
 Ha c'houi kerent, mignounet...
 E c'houlennit, enn ho sonjou :
 Perak an ti-man 'zo greet.

Diskan

Hema eo ty ar blijadur,
 An deskadurez kristen ;
 Ama 'velo ar c'hrouadur
 Petra 'ra 'r vuez laouenn.



II

Ma karont, re all a ielo,
 Da redek an ebatou ;
 Evidomp-ni, ama 'deuio
 Da ober hor c'hoariou.

III

Ama 'zeuz a bep seurt jeuio
 Evit kaout berr an amzer ;
 Tabourinou ha claironou
 'Lakañ buez dre ar c'harter.

IV

Ha pa vezo processionou
 'Vint klevet o sini brao ;
 Ha pa deuo ar pardonioù
 'R penn araok e vint atao.

V

Neuze c'hoas, eur vech an amzer,
 Ni 'zavo peziou-c'hoari ;
 Ha gant mall c'houi deui da veler
 Hon tammigou termaji.

VI

Ouspenn c'hoari 'vo grøet ama,
 Rak ar zonz on deuz ive
 Da labourat, da studia,
 Vit mad hor c'horf, hon ene.

VII

Evelse 'ta, kerent kristen,
 Gant ho pugale ama
 C'houi c'hello beza dianken,
 Dizoursi hag er joa.

L. R.

